



Gwirioù ar Vugale



Al lezennoù-mañ a sell ouzh an holl vugale gwitibunan, hep diforc'h pe zisparti diazezet war ar ouenn, liv ar c'hroc'hen, ar reizh, ar yezh, ar relijion, ar mennozhioù politikel, an orin broadel pe sokial, ar madoù, ar c'hanedigezh, pe war n'eus forzh peseurt tra-all e vefe. Al lezennoù-mañ a bled gant ar bugel e-unan ha gant e familh.

Pep bugel en deus gwir :

- Da gaout un anv hag ur vroadelezh, kerkent ha ganet,
- Da vezañ louzaouet digoust,
- Da vezañ maget yac'h ha da gavout bod en un doare dereat,
- Da zeskiñ lenn, skrivañ ha kontañ digoust,
- Da vevañ gant e dud,
- D'ober gant ar relijion a blijo dezhañ,
- Da c'hoari ha da gaout obererezhioù diduells,
- Hag ma vo graet war e dro hervez e stad-korf, e stad-spered pe e stad-sokial.

Pep bugel en deus gwir da vezañ gwarezet :

- Diouzh ar c'hrizderioù reizhel,
- Diouzh ar skraperezh,
- Diouzh ar sklaverezh,
- Diouzh ar bouverezh,
- Diouzh ar vac'hidigezh diabeg,
- Diouzh ar bazhyeverezh, dre al labour peurgetket,
- Ha diouzh an digasted hag ar c'hrizder dre vras.

Doujañ da wirioù ar re-all eo dever kentañ ar bugel, neuze :

Pep den gour a rank trezkas da bep bugel ur spered a zigoridigezh, a habaskter, a vignoniezh etre ar pobloù, a beoc'h hag a vreudeuriezh hollvedel, ha gouestlañ e startijenn hag e zonezonoù e servij e nesañ.



AR VUGALE

L'affiche a été réalisée à l'aide de " la Déclaration des droits de l'enfant" du 20 novembre 1959.

La Communauté des Sceaux : <http://cobo-so.fr>